

ILIS MIRACULUS AN ITRON VARIA REMENGOL

Savet gant ar Roue Gralon,

GOUDE MA OA BEUZÉT KÆR-IS.

Neb a bed Guere'hes Remengol,
Birriven ne dai da goll....

En Escopti Kerne, el lec'h ema brema môr Douarnenez e oa guechal eur gær vras meur-bet, hanvet Is.

Eur voguer ledan hak huel, gant sklujou houarn he difenne deus ar môr. Er gær-ze ne velet, e touez an dud pinvidic, nemet dizurs, goal exempl ha falagriez. Gralon, pehini a chome neuze, en Is a voa Roue Breiz-Izel. Bet eo abrezeller en e iaouanquiz,



AN ITRON VARIA REMENGOL.

tol zantel, daou vignon da Zone, sant Kaourintin, kenta Eskop a Guemper ha sant Guenole (1), kenta abad a Landevennek; alies o deoa prezeguet ar feiz er gær a Is, ha gourdrouzet ar Roue Gralon, abalamour d'an droug-oberou, d'an torsejou ha d'an injustiou a ret, bemdez, e pales he verc'h yaouanq: mæs goab a rêt anezou, hag ar Roue, sempleet dre an oad, nen deoa mui a c'halloud avoalc'h evit arreti dizurzou kær bras.

Doe a skuizas, er fin, o velet Is kaledet en he fec'hejou, hak a roas da anaout da Æl Breiz-Izel, he vignon, Guenole, penos, eb dale pell, ar gær gaër-ze a vije beuzet gant ar môr. Kerkent, Guenole a bignas var he varc'h, hak a redas da guær Is, o sonjal c'hoas dizarmi koler Doue. Mæs tremenet e voa an amzer a druez. P'a en em gavas an abad santel, var dro anter-noz, sclujou Is a voa digor, hak ar môr a c'hroze spoutus, o tiruillal var an dud, an tier hak ar palechou. Guenole ne allas savetei nemet Gralon ep ken; guele

(1) *Guen oll-e. Oll-e-Guen* (il est tout blanc), hanvet evel-ze gant he vam, ar santes Ven, abalamour ma oa eur buguel koant ha fur. Sant Guenole, dre e vertuizou, en deus meritet an hano kaër a Æl Breiz-Izel. (L'ange de la Bretagne.)

DOCTEUR

a rer c'hoas roudou treid e vare'h er garrek, var behini, abaoue, abadet Landevennec, araug komer ho c'harg, a deu da ober o feden ha da anaout ar Roue Gralon evit fondatour ho c'houent.

Kær-Is ne ma mui, evel Sodôm, Gômor ha Babylon; hak hirio ar môr a ruill dreist he fen.

Da zao heol, Gralon, o veza pignet, gant Guenole, var leñ Mene-Hôm, a dolas, ac'hano, eur zell truezus var he lerc'h: Mæs el lec'h ma edo ar gêr gaër a Is, na velas mui nemet môr Douarnenez, hak e kouezas d'an daoulin evit trugarecat Doue hak ar Verc'hes da veza saveteet e vuez.

Pa zavas divar he zaoulin, e velas dindan an heol, o lugerni, *Rumen-goulou*, pe *Men-ru-ar-goulou*, var pehini e vije sacrifiel, tud beo, ha beb mis, eur buguel bian, c'hoas eus ar vrôn. Neuze, beuzet en he zaëlou, hak he zaoulagad savet e trezeck an Eu, e lavaras d'he vignon santel:

« Var ar Men ru zont, consacret d'a eun Doue barbar, me a rai » sevel eun ilis caër d'ar Verc'hes, hak el leac'h ma skuiller ar goat » da Teutatès, e skuillo Mam ar guir Doue he graçou var Breiz-Izel. »

Gralon a zalc'has mad d'he bromessa, ha beleñ ar Bayanet, o veza en em revoltet, pa veljont dispen templ an Doue faos Teutatès, ar Roue christen ho zrehas e kever Argol, e pen ar Vretonnet convertisset.

Goude beza gret e beden, var Mene-Hôm, ar Roue Gralon a heuillas Guenole da Abati Landevennec, savet gantan, eun neubent blaveziou kentoc'h. Diarauc kement-ze, en devoa, c'hoas roët he balès, e Kemper, da sant Kaourintin, pehini en deoa, torrët he naon desan ha d'he compagnunes, gant eun tam deus he besk bian. E plas ar palès ze, ema brema ilis caër cathedral Kemper.

Gralon a dremenas e Landevennec, ar rest eus he vuez, en eur bini-gen galet, hak alies e kare mont gant he vignon ker da Remengol; da bedi evit he bobl, an *Itron Varia Remed Oll*. Beza en devoa an eur d'he guelet brudet bras e pevar c'horn Breiz-Izel, hak o vervel etre divrec'h sant Guenole, e Landevennec, e recommande he ene da Zoue en eur lavaret gant fiçians:

- « Itron Varia Remengol,
- » Mirit ouzin na zin da goll. »
- « Pedit ive, ho mab Jezoz,
- » Ma vezin gantan evurus. »

Pemzek kant vloas a zo, abaoue, ma e maro Gralon, hak ar Vretonet, pere zo, bepret, tud a feiz hak a galon, ho deuz c'hoas sonj eus ho Roue koz, hak eus he vignon, sant Guenole. Mæs ma c'hanevesent guelloc'h histor ho bro gaër, pa zeont da zul an Drindet, da bardon bras Remengol, ha pa velont môr bras Douarnenez, Menez-Hôm, Landevennec, ha tour huël ilis miraculus an *Itron Varia Remed-Oll*, e lavarfet, an daëlou, en ho daoulagat, en eur vale gaut respet, var douar ar Sænt hak ar Rouane:

- « Bras ar burzudou a zo bet,
- » Ebars en amzer dremenet!.... »

Bras ive ar burzudou a ra c'hoas, hirio, an Itron Varia Remengol, en andret an oll Vretonet, hak ispicial, en andret ar belerinet a deu bemde, d'he guelel, alies eus a bell bro, ha calz anezo, diar-c'hen, hak e corf ho rochedou.

Ar vinoret dilezet, an intanvezet paour, ar beorien noas, soudardet Breiz-Izel, e creis tân ar brezel, ar vartolodet var ar môr bras e furol, an oll dud affligel, a gorf, a galon hak a speret, darn en ho foaniou, darn en dangerriou, darn all en dizesper, hak oll var gouele ar maro, ho deus sonj eus ho mam dous ha mad, hak alies e leveront dezi, gant carante ha gant fizians en he galloud, hak en e madelez.

- « O Gwerc'hès vad Remengol, patronnez Brez-Izel,
- » Pedit evidomp, hirio, ha pa rankimp mervel ;
- » Pedit evit Breiz-Izel, evit ar Vretonet,
- » Ho deus ho karet, ho kar hag ho karo bepret. »

KANTIK SPIRITUEL

EN ENOR

D'AN ITRON VARIA REMENGOL (1)

PATRONEZ BREIZ-IZEL,

Kurunet dre urz hag en hano hon tad santel ar PAB PII NAO, an 30 a vis mae 1858, gant an aoutrou RENAN-NICOLAS SERGENT, Escop Kemper ha Leon, dirak eun niver braz a veleïen hag ospen kant mil den, deuet en devez-ze, a bep bro, da Remengol. (2)

Itron Varia Remed-oll.

Miret ouzimp ne c'haitmp da goll.

Var an ton : *Glac'har ar Yerc'hes.*

Tad, Mab, ha Speret-Santel, tri ferson an drindet,

Me ho ped, a vir galon, da roi din ar speret

Da composi eur c'hantik d'ar stereden vrillant

Ar fourdelisen gaëra demeure ar firmamant.

(1) Remengol hanvet gouechal. *Ru-men-goulou*, da lavaret e, *Men-ru-ar-goulou*, abalamour ma oa eno, eur men ru, pe eun templ konsacret da c'houlou De, enoret evel eun Doue, dindan an hano a Teutatés (Doue Tad) ar Roue Gralon, goude beza

Ho Merc'h eo Tad Eternel , ar Verc'hes binniguët
Pried ar Spered-Santel , Rouanez an Ælet ,
Dreist an oll groaguez devot hi so bet cavet din
Da veza mam da Jesus , hon Redemptor divin.
Pa zeuan da niveri , Guerc'hes sacr ha santel ,
An enor , ar meuleudi hoc'h eus e Breiz-Izel ,
Va speret a so dister evit ho discleria ,
Nemed oc'h-hu a zeufe , hirio , d'am azista.
Mæs ennoc'h leun a fianç em euz antreprenet ,
Pub'ia ho calloud vras etouez ar Vretonet ,
Ha discleria ar graçou accordet d'ar bed oll ,
Dre c'hraç Jezus hon Autrou , en ilis Remengol.
E pep lec'h m'eo enoret Mari , hor mam santel ;
Alies ve silaouet nep so dezi fidel ,
Mes beza e deus eur plaç , bars en pini bemdes ,
E scuill var ar Vretonet tensor he madeles.
Er plaç-ze , e Breiz-Izel , meurbet darempredet ,
En escopti a Gerne , er bares a Hanvec.
Eus eun ilis consacret da c'hloar ha da enor ,
Rouanez an oll Ælet , guir vamp hon redemptor.
Guir dud devot d'ar Verc'hes , m'ho ped , diredid oll ,
Deut gant laouenidiguez da ilis Remengol ,
Evit pedi mam Doue da roi deoc'h ar lec'het ,
Ha da zivoal hoc'h ene dious las an drouc-speret.
M'ar d'ê poaniet oc'h ene gant gouliou ar pec'het
Deut d'ar sourcen a vuez , hac ho pezo renned ,
Goulennet oc'h mam Jesus graçou celestiel ,
Ma c'hellot chench a vuez , beza dezi fidel.
Mar dê ho corf forbuët gant an infirmite
Deut da ilis Remengol gant eur guir garante ,
Ur plaç leun a viraclou dre c'hraç ar Verc'hes sacr ,
Pini en oc'h oll boaniou , ho soulajou , timat.

diskaret an templ-ze ha zavet . en e blas . eun ilis kaër da vam ar guir Doue . a chaachas hano paien *Ru men-goutou* , en hano christen a *Remengol* , da lavaret e , *Remed-oll* , deus a behini ar Batrones a zo hanvet an *Itron Varia Remed-oll* , [*Notre-Dame de Tout-hemi e*] abalamour dar burzudou bras a ra bemdez , eno , ar Verc'hes . abaoue amzer ar Roue Gralon , beteg hirio .

Remengol a zo bet , a viskoas , ar gaëra hag ar santela Ilis a *Vreiz-Izel* ; hervës an dud koz . pep guir *Vreton* , a gle eur veach , da viana , *beo pe taro* , ober pe-lerinach *Remengol* .

[2] Kurunen an Itron *Varia Remed-oll* , ar gaëra zo bet guelet biskoaz e *Breiz-Izel* , a zo en aour hag e perlés .

A bêvar c'horn Breiz-Izel , e teu pelerinet ,
Da bidi Mam hor Salver gant eur galon , barfet ,
Eus a escopti Leon , Treguer , Guened , Kerne ,
E teu an oll dud devot da veuli Mam Doue.

Dre'r brut eus ar miraclou a ra e Remengol ,
Dre graç Jesus hon Autrou , he deus ur galloud oll ,
Mar teu ar belerinet bemdes e pad ar bloas ,
D'ober an dro d'he ilis var ben ho daoulin noas.

Un nombr bras a viraclou a ra ar Verc'hes sacr ,
Ebars ilis Remengol dre c'braç Jesus he Map ,
Dre he sicour galloudus em eus antreprenet ;
Discleria lot anezo etouez ar Vretonet.

Ar Verc'hes a Remengol , er bares a Hanvec ,
E deveus grêt a nevez ur miracl caër meurbet ,
An oll a so estonet oc'h he consideri ,
N'en deus netra impossabl , dec'hu , Guerc'hes Vari.

A dost dezi eur buguel c'hoas en eun oat dister ,
Pa oa ar velin o vala , a guezas er rivier ,
Gant an dour e voa ruillet , ma c'has e toul ar bal ,
Ma songer e voa flastret , allas , gant an dour mal !

E dud gant eals nec'hamant ha melconiet oll ,
Er goestlas , a voues huel , d'a Verc'hes Remengol ;
Mari leun a garantez , dre e dorn binniguet ,
A ziouellas e vue , er meas e oue tennet.

Evit rei guir desteni deus ar miracl kaër-ze ,
Ar buguel da Remengol a voa kasset neuze ,
Laket er procession , gantan , ur c'houlouen ,
Evit publia galloud ar Verc'hes souveren.

A dost d'ar C'hastel nevez hervez ma eo prouvet ,
He deus grêt guir Vam Doue eur miracl kaër meurbet ,
Dre an tan eun tieguez a c'he da berissa ,
P'o deuz pedet ar Verc'hes da zont d'ho azista.

An ozac'h guir servicher d'ar Verc'hes binniguet ,
En em stringuas d'an daoulin d'he fidi gant respet ,
Mari leun a garantez a zigaças glao bras ,
Hak ep ober droug da zen , an tan goal a vougas.

Chom a ran c'hoaz sebezet , Guerc'hes mam a drue ,
O compren ho karantez evit ho pugale ,
En disquezet oc'heus bet d'eur c'hrouadur daou vloa ,
Oc'h ober en e andret , eur miracl ar c'haëra.

Dre eun tourmant ar brassa , eur c'hoz ty o coueza ,
Ur c'hrouadur o tremen en em gav dindanna ,

Ar vein vras en dro dezan, ma songer voa lazet,
C'hui epqen en sicouras, Rouanez an Ælet.
E dod a lavare dec'h Guerc'hes a *Remed-oll*,
Sicouret hor c'hrouadur, pe e c'haio da goll,
Ar vein vras zo remuet, ha dre graç ar Verc'hes,
Ar buguelic a c'hoarze dindan, leun a vuez.
Mari hor mam souveren var vór ha var zouar,
A den e servicherien dious anquen ha glac'har,
Nombr bras a vartolodet e deus bet preservet,
Hac an dud hac ar madou dre he graç binniguet,
Nombr bras a vatimanchou e deveus preservet,
Hac an dud hac ar madou dre he graç binniguet,
Ha bagou ha goberi e creis an tourmant bras,
Pá bedent hor Mam Mari a obtene ho graç.
C'hoas eur c'hrouadur yaouanq a escopti Leon,
A voa koezet er rivier, Doue pebez eston !
Klasquet gant cals a glac'har, a pa ho deus pedet
Ar Verc'hes a Remengol, en instant eo kavet.
Pa gävchont ho c'hrouadur, hac en prest da vervel,
Ec'h implorjont, a nevez, Mari hon Mam santel,
Da reñ dezant ar vuez dre he graç binniguet,
Dirac ar gompagnunez, ho feden zo klevet.
Eun den a c'houlet Leon, a gollas ar c'herzet,
Zo bet eiz mis o vale var bouez diou vas-loaec,
Grêt pris gant ar medecin evit troc'ha he c'har,
He roc'ha e rez e c'hlin, Doue, pebeus glac'har.
Eun nosvez en e vele e teuas sonj deza
E voa bet e Remengol gueichal o pardonna,
Hac e sant en e galon eur garantez ardant
Hac eur guir devotion d'ar Verc'hes oll buissant.
Guir vam Jesus hon Autrou, eme affliget,
Va sikouret em poaniou, Rouauez an Ælet,
A me roi e donezon kaëra tra zo hem zi
Da gass da zeiz ho pardon evit hoc'h enori.
Mari leun a garantez a bedas he mab ker
Da exauci ar beden a re he servicher :
Receo a ras ar c'herzet dre graç guir *Remed-oll*,
A bed eo oc'h he meuli en ilis Remengol.
Tregont den en eur vagic a bares Plougastel,
A gonfontas e rad Brest, gant eur barrat avel,
Oll e pedjont a galon patrones Remengol,
Eur batimant e deuas, savetet int bet oll.

Er gær gaër a Voutronlez e krogas an tan goal,
Ar flamou tan, tro var dro a velet o nijal,
Eur barner yaouanq ractal, d'ar Verc'hes a bromet
Mont da ilis Remengol, hak an tan zo mouguet.

Evit gounit ar victôr, soudardet Breiz-Izel,
A bed Mari, gant fizianç, e kreiz tan ar Brezel;
Hak ar victôr gounezet, ezeont a vandennou;
Da Remengol diare'hen, e korf ho rochedou.

Martolodet an Arvor, ruillet ha diruillet,
Var ar môr braz e furol, prest da veza kollet,
Eb ãor, eb stur, eb sicour, oll e renkont mervel,
Pa deu d'ho savetei, patrones Breiz-Izel!

Ne ouffe ket niverri na dont da henvel oll,
Ar miraclou infinit a ra guir *Remed-oll*,
Evit nep zo guir gristen ha leun a galon vad,
Hi zo guir advocades dirac Jesus he mab.

Ken a gorf, ken a ene, kement zo affliget,
Deut da ilis Remengol gant eur galon barfet,
Pedit eno, gant fianç hor mam santel Mari,
Ha renonçet d'ar pec'het evit plijout dezi.

Sant Thomas ha sant Bernad, tud guiziec ha santel,
A da Vari, mam Jesus, daou servicher fidel,
Hon assur, a bers Doue, biken, ne zai da gol,
An nep a gar ar Verc'hes, patrones Remengol!

Demp, eta, da enori, brema, da Remengol
Relegou sacr' ar Verc'hes, an daouzec Abostol
Ha Relegou sant Joseph ha guir groas hor Salver,
Maro, 'vlt al liberte, var lein mene Calvar.

Relegou sant Guenole, mignon bras da Zoue,
Relegou sant Kaourintin, kenta eskop Kerne,
Ha calç a Relegou all, gant ar Pab digasset,
E present da Remengol, evit ar Vretonnet.

Kouraich, kouraich, Bretonnet, ha gant fizians deut oll
Da velet ho Patrones en ilis Remengol,
En em roet, a vrema, da zervicha Doue,
Ha da bidi ar Verc'hes ar rest eus ho pue.

Kement ez eo enoret ha karet gant Doue,
Ma permet ganti ober herves e bolonte;
An niver bras a c'hraçou a skuill demp var ar bet,
A dremen oll dre zaouarn ar Verc'hes binniguat.

Ar bemzee eus a vis Eost, an devez ma pignas
En Evou gant Ælet en solennite vras,

E teu an oll dud devot gant guir devotion
D'a ilis kaër Remengol da c'hounit ar pardon.

Eun Doue oll galloude a bermet dre e c'hraç
Ma ze da Sul an Drindet ema ar pardon bras,
Ar bobl eus a Vreiz-Izel, a veler en deiz-se,
O tonet da Remengol da veuli mam Doue,

En deiz-se e c'honeser induljansou plenier
Ebars ilis Remengol e ti mam hor Salver,
En eur ober gant glac'har eur guir gonfession,
Hac o receo hon Saiver dre ar gommunion.

D'an eizvet a vengolo, gouel he Nativite,
Ez eus ar memes pardon en ilis santel ze,
A da peb gouel ar Verc'hes a zo e pad ar bloa
E teu an oll dud devot d'he bisita gant joa.

Er solennite santel eus a Sul an Drindet,
Kement a ya d'ar pardon a zo oll ravisset
E consideri Jusus ebars er Sacramant
O c'hortos hor c'halonou gant karantez ardant.

Deut oll eta, christenien, deut oll a vandennou
Da Remengol da bedi mam Jesus hon Autrou,
Assuret oc'h da veza gant Doue pardonnet,
Mar bec'h guir servicherien d'ar Verc'hes binniguet.

Renoncet d'ho pec'hejou, hac en em arollet,
Ebars er breuriezou a zo instituet
Da enori ar Verc'hes, evel ar Rosera,
A rent d'hor mam souveren eun enor ar c'haëra.

Ne vanquet quiet da laret bemdez eur chapelet,
Lot demeus he c'hurunen, un dizenez hanvet;
Nep a zeui d'he recita gant karantez barfet
A vezo guir servicher d'ar Verc'hes binniguet.

Tud leal a Vreiz-Izel, oll vignonet va bro,
C'hui, evit pere kalir ar vue zo c'houero,
Joa deoc'h var an douar, ha graç digant Doue
Da vont c'hoas da Remengol, ar sourcen a vue.

Pedit en ho c'hlenvejou, pedit en ho klac'har,
Ha pedit en oll boaniou, hon deus var an douar
Brassa santes so er bed, Guerc'hes vad Remengol,
M'ar bezit fidel dezi, ne deot biken da goll.

Guerc'hes glorius Vari, pedet, me ho suppli,
Evit an oll dud devot a visitai ho ti,
Chasseet an drouc sperejou demeus hor c'halonou,
Ha presantet da Zoue bemdez hor pedennou.

O Gwerc'hez vad Remengol, patronez Breiz-Izel!

Pedit evidomp; hirio, ha pa rankimp mervel;

Pedit evit Breiz-Izel, evit ar Vretonet!

Ho deus ho karet, ho kar, hag ho karo bepret.

Itron Varia Remengol, mam santel da Zoue,

Pa vimp en heur hor maro, recevet hon ene,

Ha dre ho torn binniguet kassit-hi da repos,

Ha da veuli an Drindet e gloar ar Barados.

PEDEN AR ROUE GRALON,

D'an Itron Varia Remengol.

Itron Varia Remengol,

Mirit ouzimp na zaïmp da goll,

Pedit ive, ho mab Jesus,

Ma vezimp gantan evurus.

Itron Varia Remengol,

C'hui eo Rouanez ar bed oll,

Bezit hor mam, hor Batrones,

A ni ho meulo da james.

PEDEN

D'an Itron Varia Remengol,

Evit beza preservet eus ar c'hlevejou hag ispielial

eus ar c'holera-morbus.

*(Ar beden ma lavaret a galon e deus preservet eun niver bras a dud,
ha saveteet kalz a re all, skoet gant ar c'holera, e kær Montroulez,
er bloavez 1854.)*

Itron Varia Remengol, patronès Breiz-Izel, mam an oll dud affliget,
a speret, a gorf hag a galon, c'hui a souten kourach ar soudardet, e
creis tân ar brezel, c'hui a asten ho torn a drue dar vartolodet, prest
da gonfonti er môr bras e furol, c'hui a zisken, aliès, e c'hars guele
ar c'hlanvour paour ho kar, evit rei dean ar iec'het, hac hanvet
oc'h, e guirione, *Remed ar bed oll*. Pellait, eta, diouzin, Gwerc'hes
sagr, ar vocen gant an oll glenvejou daugerus, va dioualit euz ar

naro subit, hac evit renta testen d'ho madeles, ezin, da Remengol, d'ho meuli ha d'ho trugarekaat, en hoc'h ilis santel. Eno, n'ho c'heus biscoas, refuset nikun eus ho pugale; bezit trugarezus em andret. Gouscoude, ra vezo gret bolonte Doue, ha pa zono va heur diveza, Itron Varia Remengol, ho pet truez ouzin, grit din mervel, en ho carante, evel ar saent galloudus, pere a beder en ho ty santel.

Evel ze bezet grèt.

Itron Varia Remengol,
C'hai a zo remed ar bed oll,
Pellait diouzomp an teir goalen,
Brezel, kernès hag ar vocen !...

Ilis Remengol a zo bet, abaoue amzer ar Roue Gralon, hanvet ilis *Remed-oll*, an *Ilis miraculus*, abalamour d'ar miraclou bras a ra, eno, ar Werc'hes Vari.

Dre he galloud ar c'hlanvour paour a bare,
Ar mud a goms hag an den kam a vale!

Hanvet eo, ive, ar *sourcen a vue*, ar *seunteun a c'hraçou*, abalamour d'ar graçou a ro Doue; en ilis ze d'an oll gristenien.

Nag a bec'her eus Doue dispartiet,
E Remengol, a zo bet difaziet !!!...

Ilis sacr' an Itron Varia Remengol, a zo c'hoaz hanvet, *Ilis ar Vretonet*, *Ilis ar Saent hag ar Rouanet*, abalamour, goude ma voa confrontet Kær-Is, ar Roue Gralon a reas sevel Ilis Remengol, en enor d'ar Werc'hes, evit trugarecaat Doue da veza saveteet dezan he vue; mont a re, aliès d'he bizita, e compagnunès sant Kaourintin, kenta eskop Kemper, s. Guenole, s. Guen El, ha calz a saent all, pere a veve, neuze, e kouent Landevennec, hag a prezegue ar feiz, dre ar vro.

Abaoue, an amzer-ze, Ilis Remengol a zo bet darempredet gant ar hobl a Vreiz-Izel, karguet a c'hrasou hag a induljançou, ar re vrassa, roet gant hon tad santel ar Pab, hag an eskibien.

Er bloas ma, mil eis cant pemp hac anter cant, on tad santel ar Pab, Pii nao, en deus roet da Ilis Remengol, eun tam eus a vir groas hor Salver Jesus-Christ, hac eun tam eus he gurunen spern; ar meus Pab, en eus, c'hoas, laket digas, eus a Rôm, da Remengol, eun tam eus a voal ar Werc'hes, hac eus ar bez en pehini e voa bet-sebeliet, darn eus a relegou sant Joseph, sant Joachim, sant Ian Badezour, sant Zac'hari, santes Anna, santes Elisabeth, an daouzec abostol, ar pevar avieler, an doctoret bras eus an Ilis, ha dre eur garante ar vrassa evit Remengol, en deus c'hoas, roet d'an templ santel ze, corf sant Silven, mignon ha compagnon an abostol sant Paul, ha relegou *tri c'hant pemp ha tri ugent sant*, evit *peb devez euz ar bloas*.

Arc'hescop Paris en deus roet, ive, da Ilis Remengol, darn eus a relegou sant Louis, roue Frans, santes Genovefa, patronès Paris, ha kals a re all.

Ar c'hardinalet, arc'hescop Tour, arc'hescop Bourdel, arc'hescop Lyon, arc'hescop Rouan, eskop Strasbourg, eskop Chartr', eskop Roason, eskop sant Briec, eskop an Naonet, an aoutrou Joseph-Mari Graveran, eskop Kerne a Leon, Maro en Keinper, evel eur sant, iski-bien all a Vreiz-Izel, a Frans hac eus ar vroiou all, ho deus roet da

U.S. STOCK